



PRIZIOU RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG

LOREIDI 2007

1 . Priz « Hiniennoù »

Trede priz : **Iwan BENOIST**

Iwan Benoist zo anezhañ ur paotr yaouank 22 vloaz genidik eus Pariz m'emañ o chom c'hoazh. Kroget en deus da zeskiñ brezhoneg pa oa 18 vloaz. Ouzhpenn deskiñ ar yezh en deus divizet Iwan Benoist ober eus ar brezhoneg e yezh da vat, ar yezh a soñj hag a grou enni, yezh e vuhez pemdez. Bremañ e ro kentelioù brezhoneg a youl-vat e Tî ar Vretoned e Pariz. Studier eo war ar sonerezh ha divizet en deus liammañ e varregezhioù sonerezhel gant e zudi evit ar brezhoneg. Mennet eo da sevel tonioù brezhonek nevez ha modern oc'h en em harpañ war al luskoù a-vremañ evel ar rap pe an tekno. Fellout a ra dezhañ diorren ar sevenadur breizhek dre ar brezhoneg hag e lakaat da vezañ brudet dre ar bed. War ar stern gantañ ez eus ur bladenn rap a zeuio er-maez e 2008 met tu zo da selaou ouzh tonioù Iwan Benoist war e lec'hienn dija war MySpace. E-leizh a raktresoù zo gantañ c'hoazh pa fell dezhañ sevel ur merk dilhad, ul label sonerezh, ur gazetenn pe c'hoazh sevel embregerezhioù liammet ouzh sevenadur ar vro ma vo roet ar plas kentañ d'ar brezhoneg. Kavet ez eus d'ar bodad barn e oa yael ha lañsus emzalc'h Iwan Benoist, un den yaouank oberiant-tre a gomz ouzh ar re yaouank. Dre reiñ an trede priz dezhañ ez eus bet fellet d'ar bodad barn broudañ anezhañ da genderc'hel war an hent bet dibabet gantañ.

Eil priz : **Nolwenn GUIZIOU**

War-lerc'h 7 bloaz en estrenvro he deus bet c'hoant Nolwenn Guiziou distreiñ d'ar vro e 2005 evit deskiñ he yezh. Evit se eo bet oc'h heuliañ stummadur hir Stumdi e Landerne a-raok mont da stummez war ar brezhoneg d'he zro. Met un arzoerez eo Nolwenn Guiziou da gentañ-penn rak margodennerz a-vicher eo e gwirionez. A-gevret gant he gwaz he doa savet Nolwenn Guiziou ur strollad margodennoù pa oa o chom e Dulenn : The Pirate-Puppet Company. Distro da Vreizh he deus graet he soñj kenderc'hel gant he strollad ha kinnig arvestoù ha stalioù-labour evit ar vugale e brezhoneg. Gant ar c'houblad war-eeun e vez krouet an abadennoù a ginnigont. Ne vez implijet nemet dilerc'hioù traoù kozh a bep seurt evit sevel ar margodennoù ha goulennet e vez gant ar vugale dont gant bitrakoù a bep doare. Ar pezh a blij da Nolwenn ober eo implijout ar yezh evit mont war-raok gant he micher margodennerz, komz brezhonek ha krouiñ dre ar brezhoneg evit lavaret ar pezh he deus c'hoant da embann. Graet he deus eus ar brezhoneg he yezh pemdez, ur yezh krouiñ hag ijinañ. Plijet eo bet ar bodad barn gant raktres Nolwenn Guiziou rak dibabet he deus dont en-dro d'he bro evit deskiñ he yezh hag implijout anezhi war he micher. Kinnig a ra bremañ abadennoù dudi kaer evit ar vugale, un dra hag a vank kalz e brezhoneg. Gras da Nolwenn Guiziou e vo tu d'ar vrezhonegerien yaouank, ouzhpenn studiañ, kaout dudi en o yezh ivez. Emañ Nolwenn Guiziou e soñj sevel ul lec'hienn Internet e brezhoneg diwar-benn ar margodennoù bremañ.

Priz kentañ : **Katell LEON**

29 bloaz eo Katell Leon hag eus Bro-Naoned eo. Merc'h ur familh tomm ouzh he yezh hag he bro eo. Tro he doa bet da glevet brezhoneg forzhik pa oa bihanig eta hag unan eus ar vugale kentañ bet enskrivet e skol Diwan Naoned eo bet e 1981. Siwazh ne voe ket evit chom eno ouzhpenn bloaz abalamour ma rankas ar familh dilojañ. Deuet d'an oad da vont d'ar skolaj e Blaen e teuas a-benn familh Katell Leon da lakaat digeriñ kentelioù eno, goude bezañ stourmet kalet, ma c'hallas Katell adstagañ gant neudenn ar yezh. He soñj a reas kenderc'hel gant ar yezh e lise La Colinière e Naoned goude-se ha kenderc'hel er skol-veur war-lerc'h c'hoazh ma savas ur vestroniezh war dalvoudegezh an amzerioù. Goude ur staj brezhonek e Skaer ma peurzeskas ar yezh e stagas Katell Leon gant kelenn ar yezh d'an dud deuet evit ar gevredigezh Kentelioù an Noz e Naoned pa oa 20 vloaz. Heuliet ur stummadur brezhonek ganti er skol-veur e tremenas ar C'hapes ha divizet he deus gouestlañ he raktres micherel d'ar c'helenn brezhonek. En tu all d'he studioù ha d'he micher eo Katell ur plac'h oberiant-kenañ; plijout a ra dezhi aozañ darvoudoù dudies evit lakaat he studierien da implijout ar pezh o deus desket er-maez ar c'hentelioù : c'hoariva, keginañ, ober sport, ha kant tra bras ha bihan all. E 2003 e kemeras perzh e aozidigezh ar skrivadeg e Naoned, un darvoud a vod ouzhpenn 100 brezhoneger bep bloaz e Naoned ha ganti eo bet savet Teñzor ar Gaouenn, ar c'hoari "klask an teñzor" nemetañ zo e brezhoneg. Abaoe 2005 e kenlabour gant Embannadurioù an Amzer e Naoned evit sevel levrioù farsus ha diouzh an amzer e brezhoneg. Evel-se e oa deuet er-maez ar C'hit dreistvevañ e bannlevioù Breizh ha, Rouanez ar Forbanned, ar manga kentañ e brezhoneg. Kenderc'hel a ra bremañ Katell Leon da reiñ kentelioù noz ha kas a ra war-raok ur strollad c'hoariva e brezhoneg evit ma c'hallfe ar vugale vrezhoneger o deus ranket dilezel ar c'helenn divyezhek (n'eus ket an hentenn divyezhek eil derez el Liger-Atlantel c'hoazh), derc'hel d'o yezh. Bremañ e fell da Gatell en em stummañ gwelloc'h war ar video evit kinnig stalioù labour video d'ar vugale ha d'an dud deuet ivez. Plijet

eo bet ar bodad barn gant hent Katell Leon. Diskouezet he deus Katell Leon e oa posupl, gant youl ha pennegezh, da gentañ mirout an talvoudegezhioù legadet dezhi gant he familh, mont pelloc'h goude-se, ha dont da dreuzkas d'ar re all d'o zro ar pezh he doa-hi resevet ha desket, he kement-se daoust d'ar skoilhoù zo lakaet d'ar yezh el Liger-Atlantel. Sklaer eo eo stag mat viruz ar brezhoneg ouzh kroc'hen Katell Leon bremañ ha n'he deus nemet ur c'hoant : e dreuzkas pelloc'h.

2. Priz « Kevredigezhioù »

Trede priz : **KERLENN SEVENADUREL STEN KIDNA**

Ur gevredigezh da gas ar brezhoneg war-raok eo Kerlenn Sevenadurel Sten Kidna. Anavezet mat eo hec'h anv rak tost 40 vloaz zo e oa bet savet evit kelenn ar yezh d'an dud deuet e kostez bro an Alre. Unan eus ar c'hevredigezhioù kentañ o kinnig kentelioù noz eo bet. Hag abaoe, n'eus bet troc'h ebet, gant e-tro 120 studier bep bloaz ha seizh kelenner, an darn vrasañ anezho a youl-vat. En tu all d'ar c'hentelioù o-unan, ar pezh zo heverk gant labour dalc'hus Kerlenn Sten Kidna eo an obererezhioù kinniget gant ar gevredigezh er-maez eus ar skol : baleadennoù, degouezhioù a bep seurt evel c'hoarioù-taol, stalioù lenn, kanañ pe c'hoazh stajoù "ober e brezhoneg" pe beilhadegoù niverus e kumunioù ar vro, abadennoù a ouzont brudañ mat e-mesk ar mediaoù. Ouzhpenn al labour kelenn ha kinnig dudi e brezhoneg eo empleget Kerlenn Sten Kidna el labour dastum pinvidigezh ar brezhoneg komzet ha niverelaat "teñzor abadennoù Radio Bro-Gwened". Ul labour talvoudus ken-ha-ken. Klask a ra ivez ar gevredigezh ledanaat plas ar yezh e buhez kumunioù bro an Alre en ur harpañ ar c'houlzad « Ya d'ar brezhoneg ». Divizet en deus ar bodad barn reiñ ur priz da Kerlenn Sten Kidna abalamour d'e labour dalc'hus ha skouerius evit ar brezhoneg er Mor-Bihan, un departamant e-lec'h ma n'eo ket frammet mat-tre ar c'helenn d'an dud deuet evit c'hoazh. Kinnig a ra Kerlenn Sten Kidna da live ur bastell-vro un dibab oberiantizoù a c'hallfe bezañ astennet d'an holl vroioù all tro-dro.

Kerlenn Sten Kidna : 6 straed Joseph Rollo 56400 AN ALRE

☎ 02 97 29 16 58 ✉ STENKIDNA2@wanadoo.fr

Eil priz : **GWAGENN TV ha KAOUENN.NET** (rampo)

Gwagenn TV ha Kaouenn Net zo anezho daou raktres kevredigezhel zo bet lañset e penn-kentañ gant ar soñj da sevel radioioù lec'hel e brezhoneg, unan e Bro-Roazhon, egile e Treger. O-daou o deus bet diaesterioù bras da zont da wir abalamour d'ar skoilhoù lakaet war o hent gant ar melestradur e karg da ingalañ ar frekañsoù. Kentoc'h eget bezañ digalonekaet ha leuskel pep tra da gouezhañ o deus kavet gwelloc'h an daou skipailh en em dreiñ war-du ur media all ha n'eo ket ret goulenn aotre digant den ebet evit embann traoù warnañ : Internet. Hag int ha kinnig abadennoù video e brezhoneg neuze abaoe ar bloaz paseet. Berzh o deus graet diouzhtu progammoù Gwagenn TV ha Kaouenn Net rak kinnig a reont abadennoù berr a bep seurt, abadennoù savet gant brezhonegerien yaouank evit brezhonegerien yaouank. Diazezet e Breizh-Uhel, un dachenn m'eo treut da vat an abadennoù brezhonek enni, eo troet muioc'h Gwagenn TV, ur gevredigezh savet e 1996, war yaouankizoù kêr tra ma kinnig Kaouenn Net ul lec'hienn ma c'hall pep hini leuskel e videoioù enlinenn. Gant o fersonelezhioù disheñvel, ha kaset da benn gant tud a youl-vat hepken, e tegas an daou vedia nevez-mañ un tamm avel yac'h, fent ha startijenn e

bed ar video e brezhoneg. Fellet ez eus bet d'ar bodad barn lakaat war wel intrudu an dud yaouank-se a ziskouez e c'haller krouiñ ha degas traoù nevez en hor yezh pa vezer mennet d'en ober daoust d'an diaesterioù melestradurel. Un doare da bouezañ ivez war plas brasoc'h-brasañ an teknologiezhioù nevez e buhez ar brezhoneg. Internet zo anezhañ ur media frank ha marc'had-mat n'eus ket da c'houlenñ aotre ebet digant den evit embann traoù warnañ. N'haller nemet hetiñ buhez hir d'an daou raktres talvoudus-mañ.

Gwagenn TV : 📞 06 16 73 40 38 📧 gwagenn@gmail.org
Kaouenn.net : 📞 02 96 49 12 07 📧 kaouennfm@yahoo.fr

Priz kentañ : **Divskouarn**

Divskouarn zo ur gevredigezh evit diorren implij ar yezh e-mesk ar vugale vihan er-maez eus bed ar skol, pe a-raok ar skoliata pe e-pad an deizioù diskol. Klask a ra bodañ en-dro d'he raktres ar gerent dezho bugale yaouank, an dud a-vicher a bled gant ar vugale vihan, ar strollegezhioù lec'hel hag ar frammoù melestradurel e karg. Evit se ez eus bet savet ur garta tri live enni war skouer karta « Ya d'ar brezhoneg » Ofis ar Brezhoneg. Ar pal eo diazezañ ur gwir rouedad etre magourioù dezho an hevelep palioù pedagogel evit aesaat ar c'helaouiñ e-touez ar gerent ha sikour anezho da gas o raktresoù da benn. Servijoù a vo kinniget gant Divskouarn ivez evel ur renabl magerezed vrezhonek. Kalz a draoù all a chom d'ober war dachenn ar re vihanañ e brezhoneg ha dafar pedagogel diazez a ra diouer bras c'hoazh. Setu emañ Divskouarn e sell d'ober ivez. Ledan-mat eo tachenn Divskouarn pa venn labourat war Breizh a-bezh ha p'eo ar gevredigezh nemeti evit poent. Fellet ez eus d'ar bodad barn reiñ ar priz kentañ da Zivskouarn abalamour m'emañ ar gevredigezh o tifaostañ un dachenn nevez evit ar brezhoneg, un dachenn hollbouezus n'hallfer ket tremen hepti ma vennomp suraat amzer dazont ar brezhoneg. Un dachenn a c'hall ledanaat an dibab micherioù brezhonek ivez.

Divskouarn : 12 straed ar Marn 29260 LESNEVEN
📞 98 83 08 91 📧 divskouarn403@orange.fr

3. Priz « Embregerezhioù »

Trede priz : **Embannadurioù AN AMZER**

Embannadurioù an Amzer zo un ti-embann diazezet e Naoned. Arbennikaet eo war al levrioù ledañ deskamant hag an oberennoù skolveuriek a bled gant ar yezhoù. Abaoe 2006 en deus divizet embann levrioù brezhonek ha pa ne resevje tamm skoazell ebet evit se. An ti-embann levrioù brezhonek nemetañ eo el Liger-Atlantel. Pevar goprad zo en ti-embann ha tri anezho a zesk brezhoneg dre gentelioù-noz e Naoned hag e Pornizh. Siner « Ya d'ar brezhoneg » eo Embannadurioù an Amzer. Abaoe o sinadur o deus divyezhekaet o faper-lizher ha degaset brezhoneg en o c'hatalog. Dreist-holl int kroget da embann levrioù dezho un ton nevez evit mont war-du ar re yaouank. Embannet eo bet ganto Kit dreistvevañ e bannlevioù Breizh hag ar manga kentañ e brezhoneg.

Embannadurioù an Amzer : 22 straed Racine 44000 NAONED
📞 02 40 73 35 26 📧 tjamet@editionsdutemps.fr

Eil priz : **AFOBAT 29**

Un embregerezh evit stummañ deskidi war micherioù ar sevel-tiez eo Afobat 29. Setu aze ur framm pell-pell eus bed ar brezhoneg emit-hu. Mat, evit doare e soñj en ur mod all renerien an Afobat. Ur gennad labour a bouez bras eo hini ar sevel-tiez e Breizh hag ezhomm tud zo er gennad-se, dreist-holl pa vo ur bern embregerezhioù a yelo o fennoù kuit er bloavezhioù da zont. Soñjal a ra da renerien an Afobat ez eus tud stummet a-feson eus ar re zo en hentenoù divyezhek. Soñjal a ra dezho ivez e vo kavet aze tud kar-o-bro a glasko chom da labourat e Breizh pa vint deuet bras. Setu perak o deus lakaet en o soñj sevel an hentenn zivyezhek kentañ en ur skol vicherel e Breizh. Goude bezañ brezhonekaet panellerezh o c'hreizenn stummañ nevez e Kemper o deus divizet kregiñ da stummañ kelennerien d'o zro. Ur raktres war grenn dermen eo ma vo savet dafar pedagogel evit kelenn teknologiezhioù e brezhoneg, ma vo stummet kelennerien d'ar c'helenn brezhonek, ma vo kizidikaet ar vrezhonegerien yaouank da micherioù dorn ha ma vo gwiadet tamm-ha-tamm ur rouedad embregerezhioù ha skolioù ma c'hall krennarded liesseurt ober anaoudegezh an eil gant egile ha kejañ gant micherioù dianav dezho. Dedennet-bras eo bet ar bodad barn gant raktres an Afobat peogwir eo ur raktres divoas, talvoudus-kaer, hag e soñj d'ar bodad e rank ar brezhoneg kavout e blas en holl c'hennadoù ar vuhez ekonomikel. N'hall ket ar yezh talvezout evit danvezioù kefredel hepken. Kavet ez eus bet e oa un dra gaer ivez ar c'henlabour pleustrek a oa bet boulc'het etre skolioù zo hag embregerezhioù ar vro.

**AFOBAT : Kreizenn stummañ an deskidi - Moulin des Landes 29000
KEMPER ☎ 02 98 95 97 26**

Priz kentañ : **STUMDI**

Ur framm anavezet mat eo Stumdi. Ar framm a-vicher kentañ bet o kelenn brezhoneg d'an oadourien hag o kinnig stummadurioù hir evit deskiñ ar yezh eo. An hini kentañ en deus savet ur hentenn liesvedia hag an hini kentañ zo bet war dachenn ar stummerezh dibaouez ivez. Mat, ma'z eus bet divizet reiñ ar priz kentañ da Stumdi er bloaz-mañ avat n'eo ket evit reiñ ton d'an holl draoù-se anavezet ganeoc'h dija. Ma'z eus bet divizet reiñ ar priz eo abalamour d'ar servij nevez kinniget ganto hag a zo e bal skoazellañ ar vrezhonegerien stummet da gavout fred en tu bennak. Evit se ez eus bet digoret ur servij gouestlet penn-da-benn d'an dra-se e Stumdi gant un implijad evit ober war-dro an teuliad. Ar soñj eo sevel pontoù etre ar stajidi niverus a zesk brezhoneg ha bed al labour : ur seurt ANPE evit micherioù ar brezhoneg. Hiziv an deiz e ouzer e vez krouet muioc'h-mui a implijoù en-dro d'ar brezhoneg. 1000 post labour pe dost zo stag war-eeun d'ar brezhoneg evel m'eo bet diskouezet gant ur studiadenn eus an Ofis. 70 % eus an dud a zesk brezhoneg gant Stumdi a gav labour war-lerc'h. Koulskoude n'eo ket anat atav d'ar re a glask brezhonegerien da gavout anezho ha n'eo ket aes kennebeut d'ar vrezhonegerien gouzout peseurt framm a c'hallfe enfredañ anezho, dreist-holl er-maez eus bed ar c'helenn. Setu, ar servij nevez-se a c'hall emichañs lakaat ar vrezhonegerien nevez da gemer muioc'h a berzh e buhez armerzhel ar vro.

**Stumdi : Maner Keranden BP 311 29413 LANDERNE CEDEX
☎ 02 98 21 39 94 ✉ bzh.stumdi@wanadoo.fr**

Ofis ar Brezhoneg / Office de la Langue Bretonne
10 straed Naonediz / 10 rue Nantaise 35000 ROAZHON / RENNES
☎ 02 23 44 04 30 - 📠 02 23 44 04 39 - ✉ ofis35@ofis-bzh.org

